

YF_0039_Ar Zoudard Maleuruz

E-barz bloavez mil eiz kant pevar ha hanter kant
E parrez Poullaouen ' zo pevar zoudard yaouank

Me a zo o vond d'o anvan deoh damaig touchant war an tan
Ar hentan eo Fanch ar Brizac'h deuz Kerfeneg Poullaouen

Ar hentan eo Fanch ar Brizac'h deuz Kerfeneg Poullaouen
Ren ar Born ha Job ar Moen hag ar Razer bihan

Setu aze pevar zoudarded ha pere 'n-eus tennet
Digouezet eo ganto, partial a vez red

D'ar bemp-warn-ugent a viz mae e oa deom ordonnet
Da vond d'ar ger da Vael-Karaez evid bezan bizitet

Ha pa oam bizitet mad, lod a oa kavet mad
Hag al lod all, dre serten, oa soudarded dre zroad

Lod deuz ouzom on-eus arhant evid en em remplaso
N'eus ket nemed ni on-daou a renkom kuitaad on bro

O kuitaad on zad, on mamm, kerent ha mignonned
N'eo ket glahar deuz unan med hini ar zoudarded

An deiz warleh e-barz e Karaez ni on-eus toud en em welet
Gand daerou on daoulagad ni on-eus en em saludet

En em saludet on-eus graet gand daerou on daoulagad
Deus ganin 'ta kamerad, deom d'evan boutailhad

Deus ganin 'ta kamerad, deom d'evan lodavi
Rag an tu-man da sez bloaz kamerad e vi din

Dougom on sac'h war on choug, on fuzuilh, on sabrenn
Aliez kousket er-maez, ni a raio pinijenn

Eun devez e oan dezertet deuz penn ma bataillon
Me a oe eur zell war ma leh, remark ma habiten

Ma habiten a oa war varc'h, me a oa iveau war zroad
Hag e houlas diganin da beleh ez ez kamerad?

Hag e houlas diganin da beleh ez ez ma mignon?
Distro en-dro war da hiz da remplis da vatailhon.

houlas = houlenas

En l'année 1854
dans la paroisse de Poullaouen, il y a quatre soldats.

Je vais vous les nommer sur le champ
Le premier c'est Fanch ar Brizac'h de Kerfeneg en Poullaouen

Le premier c'est Fanch ar Brizac'h de Kerfeneg en Poullaouen Ren ar Born et Job ar Moen et le petit Razer.

Voilà quatre soldats qui ont tiré au sort
Ce qui leur est arrivé, c'est qu'il leur faut partir

Le 25 du mois de mai on nous a ordonné
d'aller à Mael-Carhaix pour être visités

Et quand nous fûmes bien visités beaucoup furent trouvés bons mais d'autres furent sûrement soldats de droit

Beaucoup d'entre nous ont de l'argent pour être remplacés il n'y a que nous qui devons quitter le pays !

Quitter notre père, notre mère, parents et amis ce n'est pas le chagrin d'un seul mais celui des soldats

Le lendemain à Carhaix nous nous sommes tous vus avec des larmes dans les yeux nous nous sommes salués

Nous nous sommes salués avec des larmes dans les yeux:
Viens avec moi camarade allons boire bouteille

Viens avec moi camarade allons boire de l'eau de vie Car durant près de sept ans tu seras mon camarade.

Prenons notre sac sur l'épaule notre fusil, notre sabre:
souvent en dormant dehors nous ferons pénitence ...

Un jour j'avais déserté de la tête de mon bataillon en regardant derrière moi je remarque mon capitaine

Mon capitaine était à cheval moi aussi j'étais à pied et il me demanda: où vas-tu camarade ?

Il me demanda: où vas-tu mon ami ?
Retourne sur tes pas rejoindre ton bataillon.